

Kloareg Remengol

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Traou 'zo diêz da gompren. Notennou zo bet savet gand eul lenner, gand eur hreion, mez n'esu ket tu da lenn anezo.

War don : Me 'm-eus choazet eur vestrez a Eskopti Treger.

Setu koeñvet ar goueliou, setu mad an avel
Da ren al lestrig am doug er-mêz a Vreiz-Izel ;
Setu ; setu me distag a liammou va bro :
An disparti 'zo kaled, ankeniuz ha c'hwero.

Gwekfan, o ! tad ar zoniou hag enor ar Porz Gwenn,
Neb peleh bennag ez out harpet war da zelenn,
Ro d'am hlemmou kimiaduz ar yez a zirollas
Euz a hekleo Menez-Bre da hini Rohellas.

Mez perag, o ! va Doue ! pa gaoze va halon,
Perag goulenn sikour all evid ober eur zon ?
Ha ne zalhit-hu ket dem, ni, peorien an douar,
Diou vestrez a skol, anvet Karantez ha Glahar ?

Pa zoñjan en oad « üruz a dremenis er gêr,
Gwechall, tost d'am zad, d'am mamm, ha d'am c'hoarig-vager,
E kouez va homzou ken puill hag eun torrad bleuniou
A skuill e taol an arnev glizenned a zaelou.

Rag se, kent ha disklêria buhez buhez va yaouankiz,
E lavarin d'am breudeur ha d'am oll genvroiz :
Tostait, tud kaloneg, ho-pezh atao digor
Eur skouarn evdi deski soniou greet en Arvor.

Nep ho kalv a zo ganet en eskopti Kerne,
Ken tost d'an aod alaouret 'vel da vrug ar mene',
E lochenn eun atrizan euz a barrez Hañveg,
An dregont a Vezeven, mil eiz kant pevarzeg.

Nag a-wechou, pa ne vezan c'hoaz nemed eur bugel,
E weljot ha va mamm baour e guzad em havell
Hag en-touez va maillurou bara du benniget,
Evidi trehi diwarnon gwalleur an droug-spered !

Va luskell a ree bemdez, hag aliez an de',
En eur lavared din : kousk, o ! va alie Doue !
Da wad a ve ken divlamm ha Salaun ar Foll,
Ha ker laouen ha Mabig Patronez Remengol.

(Notenn el leor orin : An Itron Varia *Remel oll* : leh darempredet abaoe pell-amzer gand ar bobl a Vreiz-Izel, abalamour d'ar burzudou braz c'hoarvezet dre halloud an Itron Varia, hag hini¹ an Iliz kaer meurbed a oe savet eno`gand mein templ an doue Teutatez.)

Evel-se, dreist he mouez hlan hag he sellou c'hoarzuz,
Ne oa na sant, na louzou d'am renta evuruz,
Ken a gavis da genta mouez ha sellou Mari,
En-kreiz mogeriou kouezet chapel goz Tibidi.

En deiz-se en or hoazez on-daou war an douar,
E lavaras din : « Albert, an êlez en em gar ;
Groom evelte : laka da zorn flour em dornig,

¹ : a behini, er skrid orin.

Hag heuill adaleg hirio seuliou da vestrezig. »
Va dorn flour en e zornig, en gwir vugaligou,
Or gweled 'pad an deiz gand on deñvedigou
War ar hleuziou geuneudeg o tastum kraoñ ha mez,
Pe kreginer arhantet e-tal mor an enez.

Aliesoh e pignem en ispill ar herreg
Evid saludi gweloh kouent Landevenneg,
Menez-Hom hag e vein hir, enezenn greenn, Argol,
Ar Faou, Krozon, Plougastell, hag iliz Remengol.

Ahano 'kerz an avel, distroet en eur yez,
A hweze d'on dioukouarn a vor Douarnenez,
Ar vouihadenn² spouronuz a zellen atao dizon³,
Dindan stummm eur vran mor-zu, merh ar roue Gralon.

Mez an torrad malloziou roet d'on yaouankiz
Gand ar briñsez a werzas alhwez sklujou Kêr-Iz,
N'he-devoa digand Mari, bep gwech m'o hleve,
Nemed eur zin goapauz hag eur c'hoarz a drue'.

Seder evel eur goulmig en uhella torgenn,
E tispake d'an avel he bleo hir ha melen,
En eur deli⁴ war he bro, war an dour ha ganen
Eun daoulagad a zellou ker glaz ha bolz an neñv.

Hag evel ma seblante gortoz askelligou
D'e has, a-raog an amzer, dreist ar hoabrennou,
E tiskennem goustadig en paraj on deñved,
En eur lavared : amañ e vi sonnoh er bed.

Eur rozenn hanter-zigor n'he-deus na liou, na c'hwez,
N'o havet oll kemmesket en genou va mestrez.
Hag he zal, he goug, he dorn hag he zroad dirahen
N'o-devoa heñvel outo nemed erh ha spern gwenn.

A-wechou pa fazien, dre zudi pe dre hloaz,
He divreh karantezuz o kendro va dioukoaz
Am lake da zond ker yah hag a oe va dervenn,
En eur blij hag a zivoan en skoulm a ilioenn⁵.

Perag, emezi, d'ar houlz e vijem er hiz-se,
Perag soubla dre joaiou pe drubuil ar vuhe' ?
Bez kaled ha stourm oute,rag hennez eo mennad
An hini a gar muioh eged mab e lagad.

Petra 'deufen da veza, ma trohfe an ankou
An neudennig a liamm entreze on deizioù ?
Siwaz ! eur vleuzenn diskourr, eun durzunell hep par,
Eur zon glemmuz o vouga dindan eur bez douar.

Ar garantez on unvan, on diou galon dreizi
A zo gouest ha kizidig a boaniou pep hini ;

² Ar vouihadenn : ?

³ dizon : ? (di-son)

⁴ deli : ? (zell).

⁵ En eur blij hag a zivoan en skoulm a ilioenn : ?

Evel-se mestaol euzuz ar maro didrue',
En eur ziskar ahanout, Albert, am ziskarfe.

Hag e ven-me kantvloaziet, em-bo soñj euz an deiz
A zegas da Remengol, a gêriadennou Breiz
Da lid e-keid ar Pardon, eun hed a gristenien ;
Rag en deiz-se me douas he haroud da viken.

Pa roudennas an amheol arhantet en neñvou
Ha ker mintin e richan al lapousedigou,
Goude beza, gand Mari, heuillet an hent berra,
E weljom er bourk santel eun arvest ar haerra.

Ar bobl euz a Vreiz-Izel ! eru hemmesk a beb giz,
O tond euz an oll hentchou war-zu hent an iliz,
Hag oh ober a beb yez eur yez karantezuz
Evid kana meuleudi Mamm ar Mabig Jezuz.

Al Leonad a zoug e gaoñ⁶ a-raog ma son ar hlaz ;
O tibun e chapeled war benn e zaoulin noaz ;
Ar Hernevad o pedi Mamm an Aotrou Doue
Gand ar vouez a zifreuzas obadenn⁷ ar mene'.

Hag en-kichenn ar pagan, a stoue ken dibaot
E dal rouz, en eur houlenñ peñse founnuz en aod,
Ar Gwenedad birvidig a wele an Arvor
O reketi rouane', feiz, emgann hag enor.

Merhed deut an bep kontre ha gwisket en pep stumm,
E-touez ar re⁸, pa vijent o vale rumm ha rumm,
E weled ar plah yaouank a goste' Rosporden
Koulz hag hini Landreger hag hini Lezvenen.

Trompill an diverruzed a zo ar c'hoariou ;
Tud a vrup fall e kuzul an dennerien kartou,
Peorien dall ha klañveduz o kinnig o *Fater*
Hag o finijenn galed evid eur hoz diner.

Eun niver braz a dud skuiz, o hedal er feunteun
'Rank evid galloud kemer, euz ar picherou leun,
An doru ar muia brudet a zour ar mamennou,
Da rei nerz ha ha da beurgas ar remm hag an uriou.

E skuill a reent en o hein, en o divreh eeunet
Koulz ha dreist an izili o dalhe forbuet ;
Hag evel on tadou-kpz e teuent da bedi
Dar feunteun 'zo ken karet gand ar Werhez Vari.

Hag e lavarent, achu gante o fedennou,
A bured ar *remed all* stag euz o chupennou,
Ni a vezo divarhaing oh erruoud er gêr.
Kenavo d'or heleñvejou, kenavo d'on spizder.

Goude beza kendroet aliez ha dre boan
Er bourk, a-wechou ker braz, an deiz-se ker bihan,

⁶ e gaoñ : e gañv.

⁷ obadenn : galleg : aubade.

⁸⁸ obadenn : pere, er skrid orin.
divarhaing : divarhet (?)

E-hiz, rog en dorn Mari, d'ar stal ar skedusa
Da choaz, a-raog an distro, gwalenn ar bromesa.

Klask eure pell e kement-se an niver a gizioù
A zegas tud ar vro-hall en kreiz or pardonioù,
Ken a welas o luha, war unan alaouret,
Diou galon entre daou zorn, ingal ha kurunet.

Deom, emezi, bremañ, p'he douge war he biz.
Hag eur pennad goude-ze, daoulinet en iliz,
Dirag aoter ar Werhez, a resevas on le,
E toujom en em gemer an eil hag egile.

Tritadegoù 'r yaouankiz ha karantez wirion !
Perag e tivoanjoh⁹-hu ken abred em halon ?
Heñvel euz ar bleun a skign c'hwez ha liou re abred,
Dindan ar henta gwelarn¹⁰ ez oh ivez flastret.

Eur veradenn blijadur en eur mor a zaelou,
Siwaz, honnez eo buhez kalz a ruzudigoù¹¹ ;
Mez al laouenidigez a dremen, hir ha berr,
Skoet gand falh an ankou pe gand falh an amzer.

D'ar houlz-se 'm-boa seiteg vloaz ha Mari kemend-all,
Hep, evdi se, kaodu ar skeud a zoñjezoneoù fall ;
Or halon a oa ker flamm ha tarzadou an de ?
Pa zaillont a-raog an heol ezu a greh ar menez.

Ha koulskoude va mestrez a welen o simpla,
Ar plah a-douez ar plahed a garen ar muia
A dlee kimiad ouzin, mervel ha va gortoz
E-touez an arhêlez a nij er baradoz.

Dre ma implijed ganti poan ha louzou an dud,
Ne ankounaheen ket ar zent o-devoa brud ;
Evel-se, leun a fiziañs, eur zadornvez vintin,
E kemeris va bisah ha va baz pelerin.

Pa glevas em-boa gouestlet anezi da Zoue
Ha d'an oll zent gallouduz a bedom er hontre,
E savas gand trugarez he mouez, allaz ! simplah,
En eur zistelli¹² warnon eur zellou tenerroh.

Perag, Albert, emezi, va dilez en keit-se
Ha mond e-pad an amzer a zigoro va be',
Da weled kal¹³ ar goañv a skub an deilachou
Hag o tiruill aneze pell euz or berejou ?

Mez pa 'h eus touet ober evidon ar veaj,
Ar groaz aour euz va herhenn a vo da heritach :
Da galon a vo kreñvoh, o tougen anezi,
Hag en-dro pad da vuhez e-po soñj a Vari.

⁹ tivoanjoh : ?

¹⁰ gwelarn : ?

¹¹ ruzudigoù : ?

¹² En eur zistelli : ?

¹³ kal : ?

Kemer eta diganen an Doue burzuduz
A rentas va deveziou laouen hag evuruz.
Na ouel mui, neb en em gar, Albert, en em gavo.
Krog em dorn c'hoaz eur wech, ha bremañ kenavo !

Eun eur goude va fedenn, o skuill hag o tiroll,
A nije¹⁴ d'on patronez en iliz Remengol,
Hag echuet an teir zro d'an aoter, e saven,
En eur rei, evid ofrañs, eur houriz koar melen.

Itron Vari ar Folgoet, Itron ar Goz-Yeoded,
Sant Yann-at-Biz, Sant Urlou, Santez Anna-Wened
A bedis d'he renta yah diagent va distro ;
Mez an taol a oa skoet, hag he havis maro.

Pa n'em-boa ket diframmet en deiz va halon
Ha stlapet ar horv paour-mañ da besked ar mor don,
Eh hellan trugarekaad dorn an Aotrou Doue,
A reas eur gwir vurzud o tiwall va buhe'.

E klask a reen en enez¹⁵, en aod hag en hentchou,
En eur gemmesk he ano gand huanadou ;
Ha skuiz, eh een da ouela, skuiz ha sempl o redeg
Etre mogeriou disto kouent Landevenneg.

Hag eno, kalz êzetoh, e skuille va halon
Dirag bez roue Kêr-Iz, bez ar roue Gralon,
Ha re ar veneh santel ar re¹⁶ an eskern
A zo bet dizouaret ha laosket en eur bern.

Eun abardaevez, stouet e talgen eur hoz be'
E savas eeun dirazon skeudenn sant Gwenole,
En eur lavared din : « peoh ha bennoz dit, Albert !
Beleg a ranki beza ; sao, ha ke da Gemper. »

Ha setu, pa'z on beleg, o vond da gas ar feiz
E-mesk an dud gouez a chom pell a veneziou Breiz,
E houennan digand Mestr an neñv hag ar bed oll,
Danvez eur gwele douar en bered Remengol.

Eno, dirag ar Werhez, e veulis em havell,
Gand va zud ha va mestrez, ha dindan heh askell,
E rin gweloh ar housk hir am strafuill aliez,
Beteg ma c'hwezo trompill ar varnedigez.

Hag eno, war treuz ar bez a zavis d'am zud-koz,
Godue ma vin distroet, ha pa vin o repoz,
Pelerined Remengol, pedit, pedit Doue
Hag e Vamm garantezuz da reseo va ene.

O ! Mari, va mestrezig ! o ! bleuenn ar mene' !
Repoz en kreiz ar c'hwez mad a skuilles en Kerne
Hag en touez ar yaouankiz, en em gavo bepred
Evid kana da furnez ha da vuia-karet.

Ha bremañ, va henvroiz, deskit ar ganaouenn :

¹⁴ A nije : ?

¹⁵ E klask a reen en enez : o klask en enez.

¹⁶ ar re : a bere, er skrid orin.

Saillet eo euz va halon 'vel eun huanadenn ;
C'hwibanit son ar hloareg 'vel eun huanadenn ;
Pell goude an disparti, pell goude an distro.